



DISPUT

ETRE UR VAM HAC HE MERC'H,

PEHINI A FALIE DEZI DEMEZI

DA EUR ZOUDARD PE DA EUR MARTOLOD,

Var un ton joais.

AR VERC'H.

VA Mam, va demezit, me gar oll tud ar Roue;
 Va Mam, grit an drase,
 Me a gar an arme:
 Charmet eo va c'halon pa glévàn tambourinou;
 Pa velàn ar rejimanchou:
 Aneze emeus c'hoant
 Da choas un den yaouanq.

2

AR VAM.

Va Merc'h, meurbet oc'h sot da zonjal en armeo,
 An dud a barlanto,
 Ha chagrin o pezo;
Hep e sonjot en drouc, sur e vezo lavaret:
 Homa gant ar Zoudardet
 Hag an oll dud a vor,
 .A gollo he honor.

AR VERC'H.

Comzet nep a garo; laqêt emeus em speret
 Caret an dud a vor,
 Ar re-ze o deus honor.
En instant ma o guelàn, e rejouis va c'halon;
 Eno ema va mignon:
 Anezo emeus c'hoant
 Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Va Merc'h, en amzer-màn n'estimer qet ar plac'het
 A dal ma vent guelet
 O comz gant Soudardet,
Balamour d'o habit, pehini zo scandalus,
 D'ar merc'het gen danjerus:
 Diouïallit oc'h honor
 Eus an oll dud a vor.

AR VERC'H.

Va Mam, an dud a vor a zo tud rejouisset,
 Merdaidy, Soudardet,

3

A goantant va speret;
 M'en em fize qent enno vit en un den souchet,
 Godiserien ar plac'het;
 Anezo emeus c'hoant
 Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Va Merc'h, me gafe guell d'êc'h caout un den a vicher,
 Bourc'his pe baysant,
 Intaon pe den yaouanq.
 Lezit an oll dud a vor, chasset-y-eus ho speret;
 Pe e viot disprizet
 Gant an oll plac'het all,
 Ha laqet un den fal.

AR VERC'H.

Va Mam, ar botret/vrao zo e servich ar Roue;
 Mar dint potret vaillant,
 E zeont insessamant
 D'an arme, p'o goulen, ret ê deo oboissa,
 N'o deus gard da rezista,
 Hag anezo emeus c'hoant
 Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Va Merc'h, ar Zoudardet coulz hag ar Vartoloded
 A ra rejouissanç
 Gant arc'hant ar Roue Franç.
 E fin o'c'hampagnou e zeont d'an hostaliri;
 Evit en em antreteni,

4

Da foueta o frusquin.
Va Merc'h, oc'h eva guin.

AR VERC'H.

Va Mam, hac e ve guir ec'h effent peb a vanne
Evit en em recrei,
O deus poan hag anui.

Pa vezont van ar mor, int exposet en danjer,
Ha da bep sort mizer:
Anezo emeus c'hoant
Da choas un den yaouanq.

AR VAM.

Mar o pe bugale, va Merc'h, pa viot demezet,
Soudard pe Merdead,
Ho rento miserabl:
En a yelo en campagn, hac e viot dilézet,
Setu c'houi abandonet,
Poan o pezo goude
O vaga ho pugale.

AR VERC'H.

Hag em be bugale, va Mam, mar bezont potret,
Evel ma vint savet
Eziat da Zoudardet,
Pe da Verdaïdi, da redec an armeou,
Evel ma ya an troupou;
Eus an arme emeus c'hoant
Da choas un den yaouanq.

5

AR VAM

Va Merc'h, c'houi zo yaouanq, n'oc'h eus nemet
pempzec vloas,

Abredic mat oc'h c'hoas

Da g'emeret eur goas.

Eun daou pe dri blavez e false din diferi,

E chomfac'h hep dimezi;

Neuze e ven contant

E qemerfac'h ho c'hoant.

AR VERC'H.

Va Mam, an exersiç, ar sifr, an tambourinou,

An oll rejouissanç

A arme Roue Franç,

A laqa va speret da garont ar Zoudardet;

Hag ar Vartoloded;

Bremàn e renqàn choas

Eus an arme va goas.

AR VAM.

Torit eta ho c'hoant, ha choazit ho fantazi,

Soudard pe Vartolod,

Va Merc'h, evit ho lod,

Pa zeo guir an arme a ra dêc'h rejouissanç,

Hag oc'h oll pasetanç,

Criomp, gant calz a joa;

Hon diou : VIVE LE ROI

FIN.